

DISPUT

Antre Potr ar Mik ha Potr ar Laez

OAR DON : Ar Mari Beg Arok

Evit an deou tremenet a zo zavet on disput
Gant daou den a zo istimet a glêvan gant kalz a dud
Antre Guillermik ar mik-hrouz demeuz a bourg Landujen
Hac Ywoanik potr ar laez douz deuz a Guerlipiozen
Deuz an evach alkoolizet heman na n'eva taken.

On devez banak potr ar laez a rakontraz Guillermik
Azeet in kichen y dan, o hevan banahou mik
Or voutañvad hrum pe kognac, a oa in tal y guichen
Hac a deue bep daou vunt, da hat kargo y weren
Evel dre gorzen o pomper, tremenenn in gorzannen.

Eoar zin farcal Ywoanik, a lavarez d'an dustu
Mar dihaneket d'evan mik, houi a zo eun den foutu
Pervuan an davernourez, neuz tappet or goaz mevier
Zo zur da vezan intañvez, goal abred deuz y hamzer
Surtout ma choma ar pratik, devesaat y vreg ir gaer.

Evel hini or general, Guillerm a dronchaz y dock
Hac a respontaz fuloret, d'Ywoanik ganton der hrock
Me chancho kalz ompiniot, mar kousantan dont biken
Da houlen konsultation, d'gant o lipper koaven
Neuz hoant gant y veg mahaouet, dont da chiffoki an den.

Guillermik

A garfe gant y hinou vloer, dre ma he hanter grevet
Goelet a real hevan douz evit terri ho zehet
Bepret avo begou lardet, hac a renko sourceial
Demeuz komportament yebet, ha deuz groague a real
Balamour na ne ket o hui, evit ober vel an dud all.

Ywoanik

Diez kavan na nalanket, goelet on den a skiant
Eveldoch houi abrutisset, dre forz evet Gwinardant
Ho koof evel or varriken, neja a zo arru stenn
Ho fri puffet ha kuloret, hru evel or guelezen
Hac o pen a zo deut houlet, hanvel deuz or citrouillen.

Guillermik

Evidon me in gwirione, na gavanket goal diez
Goelet a hanoch evel ar loe, o hevan korvadou laez
Gallet mije bet kouskoude, lavaret dre ma rêzon
Hep aon vije deut kalz a dud, da zislaret hanon
On den houech vta ha daou ugent, a zo poent braz en dizon.

Ywoanik

Na neket an or riotal, a c'hlahiet Guillermik
Divoar ar laez meusket goelet, an dud koll ho zantimant
Gant a dud kez zo hrevinet, dre effret ar Gwinardant
Hoaz hreont poan speret do zud, goude dispign o arhant.

Guillermik

Breman barz in amzer brezant, ketcoulz paour evel pinvik
Anive no zy gwinardant, ha kafe evit ober mik
Potret ar mik avo goelet, bepret joutuz a hoarzi
An everien laez a weler, karguet a velankoni
Deuz plijaduriou a real, d'ive evel jalouzi

Ywoanik

Pave noc'h a ni blijadur, tispign in hostelleri
Ar vreg paour ave aliez, ir gaer o gwanadi
Penaruo Yann barz ar gaer, pri ha bouillen meo dall
Na deuo maez deuz y hinou, nemet dissuitajou vall
Pelech man an unvréou kaer, neuz graet ar plach kez goejall.

Guillermik

Ar mik meuz laket im brenden, a zgasas nerz dar botret
Klevet meuz bet hoaz lavaret, tige bruchet dar merhet
Merhet goejal gant iouth ha laez, je plad losk ha ledan
Breman no gweler chik ha mouth, graciuz ha korved moan
Mezeriou ye ha dantelez, vé oar hore ha dindan.

Ywoanik

Ar mik a zo koz matreze, ave hret do poupinou
Kavet breman bep a gorse, evi dalhen o stripou
In mezeriou in fourdeliz, hac ho daouarn maneguet
Evel liboudenou Pariz, deuz hoant da vezan guisket
Goejal hep bezan diguizet, hoarsenk plijou dar bortret.

Guillermick

Bet drouk ha mad gant ho pizach, merhet a zoug korseyou
A neuz goaret dalhen o vlac, kencoulz evel ho mamou
Margue kourajus ar botret, barz in kreis tan ar brezel
Ar labouriou gant ar merhet, zo bet graet in Breiz Izel
Kaer a peuz bezan zavantem, ganin me niket a bell.

Ywoanik

An amzer vijeket evet, mikamo evoar ar maez
Me meuz bet hanveet merhet, oare diskwab ma votr kez
Ken koant evel steredennou, pourmen in assembleo
Mar oarenket an danz lubrik, evel merhet ar miko
Vij or yehet ho goelet, pako ken moust danz an dro.

Guillermick

Bet kontant a nep a garo, franchement me a lavar
Neusket bet kapaploch merhet biskoaz evoar an douar
Labourat in ty hac ar maez, soagnal ar vugaliou
Vez arhent zouten o honrach, a ezach in trancheeou
Foe dan hini a lack sort se, in krenk ar poupinou.

Ywoanik

Hret e anzav ar wirione, dirack preuvennou ken sklaer
Koulz merhet yaouyank ha gregue, deuz hremplisset ko dever
Oar ar poent ze konsantan kohl, na dalheket ober brud
Divoar benn ar laez, an alkool a vam kroket da disput
Breman ebarz in ber gomzou, me rei dach mont oaro klud

Guillermick

Kaer a peuz bezan orgouillouz, na nonket evi kredi
Neusket in Vranz, generalet zavantoch evidoch hou
Gand tud tisrei deuz ar brezel, meuz klevet ave dalmad
Hroet alkool don zoudardet, arok monet da gombad
Mar goch evit prouviar chronket, houi zo opotr dilikad.

Ywoanik

Ar Vrancizen a guerz disponit, evoar ho ennemiet
Divetet ezomp arok mont, da vezan etourdisset
Ha dreist oll potret Breiz-Izel, ad krenv ha leun a gourach
A renez a vara trehi pe meryel, a oar ar plac
Evit ze diveket ezom, da evit ar sort lornach.

Ywoanik

Ze zo koz ar general Joffr, neuz graet ober on divenn
Evit na voket hroet alkool da zoudardet Franz a grenn
Ha dre ze vemp victoriuz hep on daken winardant
Kar hon blevenegou nerzus, zo dre oc'h ourach ardant
Oar haillonet lor Guillou Pruss, zur da vezan triumphant.

Ma oarfech tout ar maleuriou, neuz graet an alkoll in Vranz
Avebet glac har no kalon, ha kolfech o harroganz
Oardro or million pe ouspen, deuz a zoudardet vaillant
A neuz kollet ar Vrancizen, dre effet ar gwinardant
Hep dale avo banisset, dre eurz ar gouvernement

Ha mar vije bet divennet, ar gwinardant dek via zo
Vijeket bet gwelet Bochet, tont da frantal an on bro
Zell az gredan preuvenou, a he poent dach Guillermick
Pa noch ket hoaz hre divizad, dont ze zilez kremen mik
Mar peuzket hoant da lavaret, ar henavo demp prestik

Guillermick

Ar wirione a lavaret, ha pa joujan ma mignon
Hon prest da vouelti gant ar vez, ha gant ar gontuzion
Kar na neuzket hoaz pel amzer, on devez a oan klanv braz
On daster demenz ar c'hanton, dam itren lavaraz
E hoan prest da lippad ma loa, mar hevechen Gwinardant hoaz.

Arok vije fin dar biavez, a lavare oa certain
Anem gavche on intanvez, ebarz in boarg Landujenment
Hroet ta breman ho torn din, evit ma lrin dac'h ar ser
N'evin birviken on daken, deuz ar poezon Gwinardant
Konvertisset a peuz hanon, dre ho honzo elokant.

A hoaz ram dach ar promesse, evoar ben zant kabidoch
Da kombatin ar vezventi, hac a labour'n veldoc'h
Evit ma hreno oar an douar, mesk an oll grouadurien
Kement unvaniez a gourach, hac a nerz da nem zouten
Vel a laker da nem distruj, dre skiouchou inhumen.

BRENBERT.

(Tous droits réservés)